



## Mell - stop

Fichenn savet gant Silvenn Koant

### Pal ar c'hoari

Dazober pe respont prim d'ur galv ha bizañ mat

### Da gaout

1 volotenn ur c'helc'h treset war al leur ha rannet e kement a gompodoù a niver a c'hoarierien nemet 1 ; e pep kompod e vez skrivet un anv Kêr

### Gant piv ?

etre 8 hag 15 c'hoarier ; ma ez eus re a vugale ober daou gelc'h

### Mont en-dro ar c'hoari

Pep c'hoarier zo lec'hiet en ur c'hombod dreist ar c'helc'h, un troad e-barzh, un troad er maez ; ar c'hoarier a re a gemer ar vell, hag a ya e-kreiz ar c'helc'h. Stlepel a ra ar volotenn d'an nec'h uhel hag eeun en ur huchal da skouer : « mont a ran da Vrest » ; c'hoarier Brest neuze a glask adapout ar volotenn araok ma ne gouezhfe, keit ha ma vez ar re all o tec'hel kuit pell eus ar c'helc'h, hini ar c'hreiz ivez.

Pa vez tapet ar vell gantañ, ar c'hoarier galvet a huch : « stop pe paouezet ». ret eo d'ar c'hoarierien all paouez diouzhtu

Ar c'hoarier ar vell gantañ a c'hell ober 3 faz war-zu ar c'hoarier tostañ dioutañ ha bizañ anezhañ gant ar vell. Ma touch anezhañ, hennezh a zeu da vezañ ar stleper-mell. Ma ne douch ket anezhañ, e chom stleper.

N. B. : ma ne vez ket tapet ar vell a-frip (da lavarout eo kouezhet ar vell araok bezañ tapet gantañ) e krog en-dro ar stleper kentañ ;

Ma ne baouez ket ur c'hoarier diouzhtu pa vez huchet « paouezet », en deus ar c'hoarier-se d'ober 3 faz war-zu ar c'hoarier ar vell gantañ.

### Un doare all da c'hoari

E-lec'h rannañ an dachenn gant anvioù Kêr, implijout ar frazenn : « gervel a ran .... » mui anv ur bugel hag ober ar c'hoari er memes doare.

